



REGIMENT

Ar Merc'het Yaouank

VAR EUN TON GALLEC

1^{er} Couplet

Breman memeus clevet,
 Vo gret eur regiment
 Ag enn'hi vo choaset
 An oll verc'het vaillant,
 Da vont dober brezel,
 Var an enemiet,
 Betek vo red mervel,
 Vefont fidel begred.

Discan

Passeit merc'het vaillant,
 Breman eur bragou ru.
 Da vont d'ar regiment,
 Vefet galvet dustu.

2^o Couplet

En plas ho robennou,
 Danvez deus ar c'haëra,
 C'hui a po eur bragou.
 Deuz meser ar grossa,
 Hag en dro d'ho corfou,
 C'hui po centurennon,
 Ho taoulagat lirzin
 Oute neuze vrilol.

3^o Couplet

Ho pleo hir a pentet
 En demeselet coant,
 Breman a vo troc'het
 Vet guir soudar vaillant,
 Ag en lec'h ho couëfou
 C'hui po casquetennou

O deo cocardennou,
 Ag ive eur poupon.

4^o Couplet

En plaç ho potinou,
 C'hui po eur boutou gros,
 Vit heuil an armeou,
 Couls en de vel en nos.
 Evit en em c'holo,
 A po eur gapoten.;
 Ounes va dec'h rayo
 Pa vo en amzer yen.

5^o Couplet

D'eus ar merc'het coanta,
 Certen e vo choaset,
 Er c'hargou huella,
 A da gapitenet,
 Ar re vo disket mad,
 A vo eur burayou,
 Eno vec fond ervad,
 O c'heuil an ar meou.

6^o Couplet

Ar merc'het teo a lard,
 Vo er gavalliri.
 Ag an oll verc'het stard,
 Vo en artilliri,
 Vit galloud remui,
 Ar pesiou canolliou,
 D'ober d'an ennemi,
 Cals deus ho boullijou.

7^e Couplet

Ag ar broderezet,
 Vo er voltigerien,
 Ar guemenerezet,
 A vo bars e linen,
 Er chassourien var droad,
 Vo ar merc'het a gamp,
 Blamour in delikat
 Ag eur voes elokant

8^e Couplet

Da vont en hussardet
 Ar gueguinerezet,
 Ebars en dragonnet,
 Va ar guiguerezet,
 Merc'hed ar pinsonniou,
 A vo er zoavet ;
 Er butun so kelou,
 Vont infirmierezet.

9^e Couplet

En infantiri marin.
 Ar baperezet.
 Er c'honheil disciplin,
 Ar re deo meritet,
 Da vont er saperien
 Ar merc'het terrupla.
 Envel deus archerien,
 A vo er pen kenta.

10^e Couplet

Penn a regimenchou.
 Breman e vo laket
 Gant an tamboulinou,
 Ar Guir everezet,
 Ag ar stamerezet,
 A zo er c'hlairioniou,
 Dre m'in corfou ezet,
 En penn deus an troupou.

11^e Couplet

Vit son ar musikou,
 Ar grampoërezet
 O c'heuil an armeou,
 A vo brao da welet,
 Ag an ostizezet,
 Gant ho ardou malin,
 A vo cantinierezet,
 A werzo dour vit gwin

12^e Couplet

Cetu aze, merc'het.
 Evidoc'h eur c'helou
 Cals ac'hanoc'h me gred
 A vo trist ho guinou,
 Pa vo ret d'ec'h monet,
 Da heuil ho pataillon
 Bezit fidel hepred
 Evit an nation.



31 bis

CHANSON NEVEZ

Daou den Yaouank Deus a gear Montroulez

VAR EUN TON GALLEC

Ar goas

Bonjour va douç, va c'harante
 Deut hon gant gwir bumilite (bis)
 Da laret did kenavo.
 Hon deut aman, hon deut aman
 Da servicha an drapo,
 Mont a rankan breman.

Ar Plac'h

Oh ! Louis va muia karet,
 Mervel a rin gant poan speret
 Asambles ganit breman,
 Me a iëlo, me a iëlo
 Birviken did ne vankan
 Beteg eur maro.

Ar Goas

O! Mariwon va dousik coant,
Te ne deui ket d'ar regiment
Cals re eus a dourmanchou,
Zo er brezel, zo er brezel,
Bars en toëz ar soufransou,
E teufes da vervel.

Ar Plac'h

Ma vefe red d'in breseli
Me rofe plom d'an ennemi,
Me ziscoelfe ma c'hourach
En creis an tan, en creis an tan,
Vin ket plac'h treitour na lach
Da denna 'r Prussian.

Ar Goas

Va mestres ker en kreis an tan
Evid eu plac'h so re a boan,
A gant trous ar c'hanouillou,
Teufes bouzar, teufes bouzar,
A gant ners ar mitrailou,
E couefes d'an douar.

Ar Plac'h

Ma ne c'han da vrezelli,
Da renta fas d'an ennemi,
Me a vo cantinieres,

Er regiment, er regiment,
Me ranko mont ganez
Evel gwir plac'h vaillant.

Ar Goas

Neuze ta, va douç Mariwon,
Quitefomp on daou or c'hanton
Ben eun neubeudik amzer
Gant gras Doue, gant gras Doue
Nin a retorno d'ar gear,
D'or bro ha d'or c'hontre.

Partiet in d'ar regiment
O daou gant eur galon contant,
Da servicha an drapo,
In partiet, in partiet
A beteg eur ar maro,
Vefont fidel bepred.

Cetu aze va mignonet,
Daou den en em garie parfet
Oh ia, bars an honestis,
A barfetet, a barfetet,
Gret evelthe, yauankis,
Bezit fidel bepret.

31
EUN DIMEZI GRET GANT AR VAM

VAR TON : ROSETTE

Ar Vam

Eru eo ar moment
Va merc'h ret eo dimezi (bis
A da sonjal breman, (bis
Petra peus da ober,
Da guitat a renka,
Ag ar bed dilezer.

Ar verc'h

Va mam ne gomzit
Diu c'hoas deus a zimezi, (bis
Rag yaouankik hon c'hoas
Da vont da ren ar bed,
Nemeus ne met c'houzec vloas,
Dimezi na rin quet.

Ar Vam

Va merc'h, sent dic uzin (
 Rog ma quittain ar bed. (bis
 Gant aon em goude
 E neur gafes tromplet
 Ag ar rest ar vue
 Malhevrus var ar bed.

Ar Verc'h

C'hui ne n'och ket prest c'hoas
 Va mam da zont dam c'huitat
 Ben neubeut blaveziou (bis
 Vin muioc'h avancet. (
 A ben fin ho teño,
 Me a mo va choas gret.

Ar vam

Va merc'h eun den yaouank
 A so demeus da c'houlen
 A so den a zoare, (bis
 Hervez ma seblant din, (
 A den a galite,
 Kemer n'hean hardi.

Ar Verc'h

Va mam en ho cosni
 Ne glean ket ho refus,
 Ma ran eur parti fall,
 Neur glem na rin biken ;
 Mez c'hui deut da zioual,
 Ne pe goude anken.

Ar Vam

Va merc'h me en assur
 Deus ar pezh a meus laret (bis
 Gant henes vi contant, (
 Tre ma vi var ar bed ;
 Dimez hep n'ec'hamant,
 Bara did vanko ket.

An Dimezi

Cetu ta dimezet
 Ar plac'hic gant he mam (bis
 D'an oad a c'hwezek vloas (
 Da vont da roul ar bed,
 A goud petra re c'hoas,
 Allas ! ne ouie ket.

Ar Blijadur

eur pennad e zint bet
 O veva gant plijadur, (bis
 Siouas an evrusted (
 Er bed neo ket padus.
 Rag heman e deus bed
 Eun den gwel dangerus.

An Dizesper

Ouspen meo, didalve
 Eo, sur ive bambocher. (bis
 An arc'hant a c'homme (
 Entro pad ar zizun.
 Ve lonket en eun de
 Ag e vreg chom da yun.

Ar gwel Vue

Pa neur gav c'hoas er gaer
 E commans d'ober bue (bis
 Tollet a distolet, (
 Alies bazateet.
 Cetu aze ar vue
 Zo entre daou bried

Ar Vam Dezolet

He mam pa deuz gwelet
 Ar vue voa entreze (bis
 A zo bet dezolet. (
 O velet he doa gret
 Malheur he merc'h caret,
 Tre vije var ar bed.

Acis

C'hui tadou ha mamou,
 Ne re ket evel homan, (bis
 Ne deut ket da bressi (
 Dimez ho pugale
 Gant aoun, evelthi,
 O pefe keus goude.

Lesit o pugale
 Ho eun d'hober ho choas (bis
 Pa eo int rank usa, (
 Eo just d'he choas ive,
 Ma ne larit netra,
 Vefe divlam goude.